

I) Karta Ya d'ar brezhoneg

Skoazellet e vez ar strollegezhioù lec'hel gant Ofis Publik ar Brezhoneg a-benn diorren ar brezhoneg. Krog eo Kêr Vrest da gemer diarbennoù a-benn tizhout live 2 karta Ya d'ar brezhoneg : ha prest oc'h da genderc'hel gant an hent-se a-benn tizhout al live 2, da vont pelloc'h c'hoazh? Gant peseurt deiziataer ?

Brest a venir !

Mont a refomp war-raog gant ar pezh a zo bet kroget evit reiñ plas d'hon yezh e Kêr Brest. Fellout a ra deomp kaout ur bolitikerez gwir e keñver ar yezh.

Brest écologie solidarités

Ya, labouret e vo evit tizhout al live 2 ar bloaz gentañ hag al live 3 da c'houde.

II) Ar brezhoneg er vuhez foran

1. Prest oc'h da gaougantañ ha kenderc'hel gant dibab ar c'huzul kêr a-vremañ (miz Gouere 2019) da hollekaat ar staliañ panneloù-straed divyezhek e pep lec'h bep gwech ma vo unan staliet pe erlec'hiet ?

Brest a venir !

Ya, ni 'zo prest evit mont war-raog gant panieloù divyezhek e pep lerc'h e kêr bep tro ma vo cheñchet anezhe pe staliet traoù nevez. Ret e vo ober war-dro panieloù tro-dro ar skolioù publik divyezhek ivez evit ma vije gourvezet gant an holl pelec'h emaint.

Brest écologie solidarités

Poent bras eo lakaat da dalvezout, da vat, an divizoù asantet dezho gant ar c'huzul-kêr a zo hiziv e penn an traoù. Eus an evezhiekañ e vo Brest Ekologiezh Kengred war implij an div yezh war an holl banelloù straed nevez, e Brest evel-just, met ivez er veurgêr. Astenn a raimp an diviz-se evit an holl banelloù titouriñ er strollegezh hag hor seizh gwellañ a raimp evit ma vo graet ur c'henlabour a zoare etre an holl servijoù war an dachenn-se.

2. Prest oc'h da lakaat SKED da gemer perzh e labourioù ar bodad « anvioù straed » ? Penaos ?

Brest a venir !

Degemeret e vo SKED da gemer perzh e labourioù ar bodad « anvioù straed », evit ma vije adlakaet an traoù e brezhoneg ma 'z eo bet treustroet, pe evit sikourat ac'hanomp da reiñ anvioù tadoù Breizh pa vo ret reiñ anvioù nevez d'ar straedoù.

Brest écologie solidarités

He c'harg he deus SKED, evel kevredad ar c'hevredigezhioù sevenadurel vreizhek, er preder a-stroll war implij ar brezhoneg, ha goulennet e vo ganeomp-ni ali ar c'hevredigezhioù lec'hel pa vo bodet ar c'huzul karget da zibab anvioù straed nevez.

Kinnig a c'hellor, da skouer, reiñ ur statud perzhiad dezho bewech ma vo bodet ar c'huzul-mañ.

3. A-du emaoc'h evit reizhañ an anvioù lec'h skrivet fall a fed reizhskrivadur hag implij an anvioù-lec'h orin e brezhoneg ar muiañ posupl pa vo savet hentoù nevez, lodennaouegoù h.a. ? Ha sevel a reot a-enep da intrudu pe berzioù ar Post e sell da c'hallekaat an anvioù straed pe gumun ?

Brest a venir !

A-du 'omp evit reizhañ an anvioù bet skrivet fall ha derc'hel gant anvioù brezhoneg pa vo savet hentoù nevez pe lodennaougoù (met n'omp ket evit mont war-raog gant mont war dachenoù nevez, ni soñj deomp eo ret laosk an douar d'ar beizanted). Difennet e vo an droed da skrivan ar chomlec'hioù e brezhoneg pa vez skrivet d'ar vignoned (diwallit d'ar re a zo o labourat en ti-post memestra : an holl ne gomz ket brezhoneg, arabat lakaat anezhe e diaesamantoù. An divyezh a c'hell bezañ plijusoc'h pa vez re disheñvel)!

Brest écologie solidarités

Daou zibab 'zo da gemer aze : Implij an anvioù lec'h kozh en ur adskrivañ anezho diouzh ur mod doujus ouzh ar brezhoneg, hag ober, pa vo da zibab anvioù nevez, gant ar re degaset gant istor al lec'h. Da lavaret eo, ma vez lakaet Ronan Pichon e penn an ti-kêr, ne vo ket dibabet anvioù evel Rue des Lilas pe Allée des Pingouins, met kentoc'h anvioù evel Straed an Iliz pe Hent ar vilin. Ne vo asantet ganeomp da emell ebet war an dachenn-se, da c'houlenn ebet, digant tud pe strolladoù hag a glaskfe kemmañ pe gallekaat ar mod da skrivañ an anvioù lec'h e brezhoneg.

4. Petra emaoc'h e soñj ober evit brasaat plas ar brezhoneg war ar panneloù touristel ha war ar skritellañ e kêr dre vras ?

Brest a venir !

C'hoant hon eus profitañ eus anvioù hent evit ober deskadurez ar bobl gant plakennoù-straed diwar-benn buhez an nen. Plakennoù-se vije divyezhek pe teiryezhek. D'hon soñj e vije brav reiñ plas da « yezh ar morlu » ivez. Plijout a rafe deomp labourat asembles ganeoc'h diwar plas ar brezhoneg e kêr ivez : gwelout asembles ar pezh a vefe efedusoc'h.

Brest écologie solidarités

Ganeomp-ni e vo lakaet ar brezhoneg war wel war ar skritelloù, ar muiañ ar gwellañ. Ur c'henlabour a vo graet evit-se etre ar servijoù, en ur lakaat da gompren ar perag eus an diviz-se diouzh ur mod ledan, eus servij titouriñ ar sevenadur, betek hini an douristelezh, an dilastezañ hag ar c'helenn da skouer. Pourvezet e vo al labour-se evel ma vez ret evit tizhout ar pal : kaout ganeomp ar barregezhioù ret hag ar youl bolitikel evit ma vo lakaet ar brezhoneg muioc'h war wel evit ar Vrestiz, ar Brestadezed, ha war un dro, ar re deuet eus an diavaez.

5. Prest oc'h da gemer e kont ar brezhoneg er galvoù da ginnigoù da zont da adneveziñ ar panellerezh ha da zoujañ ouzh ar parder brezhoneg / galleg war an holl banelloù divyezhek ?

Brest a venir !

Kemeret e vo kont eus ar brezhoneg e keñver panielloù a vo da sevel, hag e vo graet hon seizh gwellañ e keñver ar parder.

Brest écologie solidarités

Ne vo ket asantet ganeomp marc'hata war implij ar brezhoneg war ar skritelloù, ha graet e vo gant yezh ar vro ganeomp war an dachenn-se bewech. Kefridi ar strollegezh e vo hag hini an aozadurioù a c'hellfe labourat eviti. Doujañ a raimp, evel-just, ouzh ar reolennoù kuzuliet gant Ofis Publik ar Brezhoneg, peurgetket an implij kevatal eus an div yezh.

6. Setu bloavezhioù ma c'houlenn ar c'hevredigezhioù breizhek ma vez savet ur gwir "Ti ar brezhoneg ha sevenadurezh Breizh", a vije un arouez sevenadurel skedus o lakaat da dalvezout glad hag Istor Brest, he liammoù gant ar brezhoneg, oc'h aozañ darvoudoù sevenadurel breizhek e kreiz-kêr. Ma vezit dilennet, hag ur gwir Ti ar Vro hor bo e Brest, evel ma z'eus e Kemper, Roazhon, Naoned, Sant-Brieg pe Wened ?

Brest a venir !

Brav e vije deomp mont war-raog gant ar raktres pouezus-se. Ret e vo deomp labourat asambles evit kaout ul lec'h a vije prest da zegemer an holl sevenadur liammet gant ar yezh.

Brest écologie solidarités

Ur youl greñv 'zo ganeomp war dachenn ar brezhoneg hag ar sevenadur breizhek. Klask a raimp gant ar c'hevredigezhioù lec'hel prederiañ gant youl war ar mod da sevel ur gwir Ti ar Vro : Un ti e kreiskêr e vo, aes da dizhout d'an holl, tost da hentoù an dezougen boutin, hag a c'hello, diouzh an ezhommoù, diouzh ar goulennnoù ha diouzh e bourvezioù, bezañ ur gwir lec'h evit ar sevenadur e Brest ha memor ar gêr. Salioù a c'hello bezañ miret ennañ evit implij ar brezhoneg hag e zeskiñ, evit an dañs hag ar sonerezh war un dachenn ledan. Pa vo roet d'al lec'h-se binviji sevenadurel a vent etre ha liesimplij, e c'hello servij ivez evit krouiñ war dachenn ar sonerezh, ar c'hoariva ha meur a seurt arz all, hep chom, dre ret, war re ar c'hevredigezhioù sevenadurel breizhek, digoret ma c'hello bezañ ivez da holl gevredigezhioù an tiriad, ha muioc'h c'hoazh, da sevenadurioù liesseurt, gant ar soñj eskemm dibaouez er vuhez sevenadurel.

Evit ur raktres ken bras, e rankimp mont dreist bevennoù an tiriad fiziet ennomp ha goulenn digant aozadurioù kevredigezhiek all ar rannvro en em glevet ganeomp evit sevel ur benveg frammañ kreñv a-walc'h evit lakaat hor glad da dalvezout ha reiñ lusk d'an endro sevenadurel breizhek e Brest.

III) Ar brezhoneg en deskadurezh

1. Hag-eñ, ma vezit dilennet, e sikouroc'h da ziorren hentennoù divyezhek ha dre soubidigezh nevez ? Ha da gehentiñ war an hentennoù-se ? Peseurt youl ho peus ?

Brest a venir !

YA ! Pouezus kenañ eo an dra-se evidomp-ni. Ober a refomp war-dro an hentennoù divyezhek er skolioù publik, evit ma vije posubl dezhe kreskiñ. Ret eo perennañ ar pezh a zo dija : Aubrac, Keliverzan, Kerargaouyat -ha Simone Veil ma vez digoret (mont a ra mat an traoù gant Jacquard). Ret eo sikourat ar skolioù-se evit ma vije digoret klasoù nevez, da reiñ lañs d'an hentennoù. Evidomp-ni eo an dra pouesusañ d'ober er bloavezhioù o tont. Pa vo staliet mat an hentennoù-se e vo moien deomp kenderc'hel gant digoradurioù nevez.

C'hoant m'eump sikourat an ATSEMed da gaout stummadur e brezhoneg ivez. Hiziv an deiz e vez kinniget dezhe ober ur stummadur un devezh ar sizhun. An dra-se n'eo ket trawalc'h. Fellout a ra deomp sikourat anezhe da gaout ur stummadur 6 miz, keit ma vijent gouest da labourat e brezhoneg.

E keñver ar mareoù « tro-dro ar skol » (diwallerezh, kantinenn) e soñj deomp hag ez eus tud yaouank a vije kontent da vezañ buhezourien hag a zo gouest da gaozeal brezhoneg: ret e vije lakaat anezhe da labourat 'barzh skolioù divyezhek, gant ar skolidi divyezhek. Buhezourien titlet a vije ret stummañ ivez ma fell dezhe deskiñ brezhoneg.

Brest écologie solidarités

Divizet ez eus bet digeriñ un hentenn zivyezhek e pep karter eus Brest betek-henn ; Heuliet e vez an teuliad-mañ gant Ofis Publik ar Brezhoneg ha kevredigezhioù eus an tiriad, SKED peurgetket. Emaomp gant ar soñj kenderc'hel gant an hent-se hag ober ar pezh 'zo ret evit tizhout ar pal c'hoantaet : Da heul digoridigezh an hentenn zivyezhek e skol Simone Veil en distro-skol a zeu, e vo studiet ganeomp efedoù ar politikerezh-se, a gevret gant ar re a gemer perzh ennañ, da lavaret eo klask gouzout penaos kenderc'hel diouzh ur mod asur war hir termen gant an hentennoù digoret betek-henn ha penaos

Ret eo deomp soursial ouzh emdroadur niver ar skolidi lakaet en hentennoù-se hag ivez ouzh o darempredoù gant re an hentennoù unyezhek er memes skolioù. Ret e vo kavout salioù evit an hentennoù-se ouzhpenn-se. Bruderezh a raio Ronan Pichon hag e skipailh evit an hentennoù divyezhek hag an hini a ra gant ar soubidigezh.

2. Skoazell a reoc'h evit arc'hantaouiñ krouidigezh magourioù ha/pe lec'hioù degemer all evit bugaligoù e brezhoneg ?

Brest a venir !

Souetiñ a reomp sikourat ar magourioù publik. Ret eo reiñ plas d'ar brezhoneg enne en ur stummañ ar re o deus c'hoant hag a zo o labourat er magourioù, pe o lakaat an holl da anavezout lec'hioù ma vez komzet brezhoneg gant ar skoazellerezed-vamm. Ret eo lakaat war well ivez ar skoazellerezed-vamm a zo divyezhek du-hont ivez.

Brest écologie solidarités

N'eus ket bet tu da zigeriñ ur vagouri vihan a vefe bet graet enni gant ar brezhoneg dre soubidigezh met, dre chañs, n'eo ket bet dilezet ar raktres. Ret eo d'ar gevredigezh a ginnig ar raktres kavout ar mod da dizhout he fal. Bezet pe vezet, e teu anat deomp e vank lec'hioù degemer evit ar re vihanañ e brezhoneg hag e vo sikouret ganeomp ar re a ginnig ar raktres-se, ur raktres ha ne vo ket kaset da benn buan ma ne vez ket graet war e dro diouzh un doare poellek ha micherel.

3. Prest oc'h da genderc'hel da skoazell skolioù DIWAN ar gumun a-fed kellidañ ha da dalañ ur skodenn-skol kevatal ? Pe da reiñ ar skodenn-skol da vugale ho kumun a ya d'un hentenn divyezhek pe dre soubidigezh en ur gumun all ?

Brest a venir !

Mont a refomp war heul ar pezh a zo hiziv an deiz war an dachenn-mañ.

Brest écologie solidarités

Ya, evel-just. Evit ar Vrestiz hag ar Brestadezed, e skolioù ar gêr.

4. Prest oc'h da ginnig 1 eurvezh brezhoneg d'an holl skolidi ha skoliadezed brestat (pourchaser eo SKED eus an doare-mañ a ra berzh met re nebeut a glasoù hiziv an devezh) ?

Brest a venir !

Mont a refomp war-raog gant ar pezh a zo hiziv an deiz. Ret e kenderc'hel al labour a vez graet dija. Brav e vije deomp kreskiñ niver a vugale o tisoloiñ ar yezh er skolioù publik e Brest. Brav 'vije deomp reiñ plas da yezhoù all komzet e Brest ivez, gant sikour ar sevenadurioù a zo e Brest.

Brest écologie solidarités

Ret eo, war hor meno, lakaat da gaout un tañva eus ar brezhoneg e pep skol ha kinnig a raimp hor sikour bolitikel da gement intrudu a vefe evit-se. Broudet e vo ganeomp an holl skolioù da c'houlenn mont gant an hent-se ha kinniget e vo ganeomp abadennoù graet evit-se d'ar skolioù publik pa c'hellimp hen ober (e framm « roll abadennoù kêr Vrest », an TAPoù, hag eurvezhioù tañva ar steuñv eo karget ar CD29 d'ober war e dro). Klask a raimp lakaat tud an deskadurezh prevez da gompren talvoudegezh ar brezhoneg er skolioù hag o broudañ da c'houlenn ar skorennoù a c'hellont kaout war an dachenn-se e framm al lezenn Debré.

IV) Ar brezhoneg e buhez an Dinaz

1. Ma z'oc'h dilennet, hag-eñ e vo savet ur post a zilennad daveat ha dileuriet evit ar brezhoneg, ken evit kêr, ken evit ar veurgêr ? Ur c'hefridiad gouestlet a-bezh d'an danvez-se ? Daoust hag e vo roet d'ar politikerezh a-fet yezh ur raksteuñv a-ziforc'h hag a-vent gant an daeoù hag an ezhommoù ? Peseurt sammad ? (erbedet : 1€/bloaz da nebeutañ dre annezad)

Brest a venir !

Ma 'z omp dilennet, 'sûr e vefomp aketus kenañ ouzh plas ar brezhoneg e keñver an deskadurezh Stad ha sevenadurel. Diwallet e vo a dost ouzh ar brezhoneg er vuhez pemdeziek.

Brest écologie solidarités

Evel-just, ur gudenn a-bouez eo dazont ar brezhoneg, ur gudenn a rank bezañ lakaet war wel war an dachenn bolitikel, HAG e ranker degas ar pezh 'zo ret evit ma vo asur : Un dilennad e karg eus ar brezhoneg a vo evit-se, hag ur goprad brezhoneger karget da labourat er servijoù graet evit-se, e liamm gant an holl servijoù.

Ouzhpenn-se, hag ar re gentañ oc'h o klevet ar c'hinnig-se, e roio Brest Ekologiezh Kengred ur budjed resis da bolitikerezh ar yezh hag a vo 1€ dre annezad pep bloaz, da lavaret eo 140.000 € gant kêr Vrest (210.000 € gant ar Veurgêr ma teuomp a-benn da astenn ar politikerezh-se enni)

2. Hag a-du oc'h evit ensaviñ ur c'hengor ez-dinazel/bodad kuzuliañ hag eveshaat engouestladennoù karta "Ya d'ar brezhoneg" hag en em vodfe div wezh bep bloaz.

Brest a venir !

Ur soñj vat e vije labourat asambles evit mont war raog gant hon palioù.

Brest écologie solidarités

Ober a raimp hor seizh gwellañ evit ma vo doujet ouzh an holl zivizoù kemeret gant an ti-kêr war an dachenn-se betek-henn

3. Hag a-du ez oc'h da niveriñ pet gwazour-ez divyezhek a zo er strollegezh ha talvoudekaat, mar fell dezho, o barregezh a-fet yezh ? Pe da vare ?

Brest a venir !

Tud 'zo a gomz brezhoneg pe yezhoù all hiziv an deiz dija : a-du 'omp evit kregiñ bremañ-diouzhtu gant a re a felle dezhe kaout ur skritell divyezhek da skouer evit ma vije posubl eskemm e brezhoneg pe yezhoù all war an dachenn.

E keñver ar buhezourien a zo o labourat er skolioù, e soñj deomp e vije ret d'ar brezhonegerien a blijfe dezhe labourat 'barzh skolioù divyezhek skrivañ o live yezh war o c'houlennnoù post.

Brest écologie solidarités

Muzuliet e vo ganeomp-ni liveoù an implijidi war ar brezhoneg ha war yezhoù all, hag ar youl a c'hellint kaout evit o uhelaat, a-benn gouzout petra a c'hellimp ober war an dachenn-se hag ar pezh a c'hellimp lakaat da dalvezout. Graet e vo ganeomp e-kerzh ar bloavezh kentañ ma vimp e penn an traoù.

4. Ha prest oc'h da drebadekaat ha kreñvaat ar c'hinnigoù prantadoù-stummañ d'ar brezhoneg evit ar wazourien-kêr ? Penaos ?

Brest a venir !

Kroget e vo gant an dud a zo o labourat gant ar vugale er skolioù ha magourioù evel hon eus krivet uheloc'h. Soñjal a ra deomp eo ret kaout ur stummadur hir evit dont a-benn da labourat e brezhoneg. Setu perak e vo lakaet anezhe d'en em stummañ e brezhoneg pad stajoù hir. Da skouer, e vo posubl kaout div ATSEM a fell dezhe mont da zeskiñ brezhoneg : lakaet e vo unan da vont e penn-kentañ bloaz (Gwengolo/Genver) hag hini all 'fin ar bloaz (Genver/Gouere), mod-se e vije ret enlerc'hiañ ur post leun war ar bloaz, en ul lakaat an elerc'hier hanterbloaz 'barzh ar skolioù.

Brest écologie solidarités

Stummadurioù 'zo hiziv an deiz (an hini kinniget gant SKED, hini ar CNFPT) met, war hor meno, ne vez ket graet a-walc'h ganto ha ne vezont ket, dre ret, aes ha marc'hat-mat evit gopridi ha gopradezed ar veurgêr. Evit mont pelloc'h ganti e kinnigimp bodañ ar re a ra war-dro ar stummadurioù-se ha servijoù an ti-kêr evit prederiañ a-stroll war ur mod liesseurtoc'h da stummañ war an tachennoù micherel hag ar mod da gaout yalc'hadoù klok evit-se.

5. Hag a-du oc'h evit kinnig un degemer divyezhek e gwazerezhioù zo, gant koskor a-youl-vat, o staliañ ar panellerezh rekis hag hewel el lec'hioù dibabet (skritelloù, badjoù..) ?

Brest a venir !

Ya, a-du omp gant panellerezh divyezhek evit an holl re a blijjo dezhe en ober (da wellet war lerc'h petra vije efedusoc'h : skritelloù, badjoù...).

Brest écologie solidarités

Pa vo gouezet ganeomp pere eo liveoù yezh an implijidi, e vimp evit reiñ da c'houzout petra a c'hellimp ober evit degemer hag eskemm e brezhoneg.

6. Hag emouestlañ a rit da enskrivañ ar varregezh "brezhoneg" war vuioc'h a fichennoù-stael ? (ATSEM, Levraoueg, degemer ar c'hevredig, talvoudekaat ar glad...) ?

Brest a venir !

E keñver an ATSEMed, e fell deomp stummañ ar reoù a zo war ar postoù hag a zo a youl vat. Labourat a reont abaoe bloavezhioù dija, ober a reont strivoù, met n'o deus ket bet ur gwir stummadur jamès. Kroget e vo gant al labour-se da gentañ. War-lerc'h, e keñver digoradurioù klasoù divyezhek e vije brav kaout ATSEMed divyezhek, neuze e vije brav kaout ar varregezh yezh war ar fichennoù-post.

E keñver ar micherioù all, e vije brav goulenn ar varregezh yezh pa vez ezhommoù. Gwelet e vo ar varregezh yezh evel un dra ouzhpenn pep tro, met ne fell ket deomp lakaat anezhañ da vezañ an hini pouezusañ. Fellout a ra deomp kaout tud a vicher, a zo stummet mat hag a zo barrek war ar micherioù... ma'z int gouest da gaozeal e brezhoneg e vo gwelloc'h c'hoazh.

Brest écologie solidarités

Diouzh an ezhommoù komprenet gant hor skipailhoù e vo evel-just, hini ar vediaoueg peurgetket, met anat e teu deomp e rankor derc'hel kont eus al live war ar brezhoneg pa vo tutaet gant ar rouedad mediaouegoù, evit gellout ober ul labour dereat gant ar skolioù divyezhek ha gant Diwan peurgetket. Ezhommoù bras 'zo, ouzhpenn-se, gant micherioù an deskadurezh dre vras hag e rankimp klask bastañ dezho o stummañ implijidi war ar yezh pe o tuta reoù barrek warni.

7. Degemer a reot ar c'hentanvioù brezhonek e Marilh ar Boblañs ?

Brest a venir !

Hiziv an deiz e vez aotret an holl anvioù e ti-kêr Brest. Mont a refomp war-raog gant ar mod-d'ober-se.

Brest écologie solidarités

Ya, degemeret brav e vo ar Fañched bihan.

8. Ha kinniget e vo ganeoc'h (evel e Roazhon) ul levrig-familh divyezhek ?

Brest a venir !

Posubl e vo deomp soñjal en-dra se, evit an holl re a felle dezhe.

Brest écologie solidarités

Ya, ha teulioù all ouzhpenn-se.

9. Hag-eñ e vo staliet ganeoc'h ur skritellerezh divyezhek ouzh savadurioù ha karbedoù an Ti-Kêr, ar Veurgêr hag ar gwazerezhioù stag (Dourioù ar C'huzh-Heol h.a.) ?

Brest a venir !

An abretañ ar gwellañ... met n'oomp ket evit lâz deoc'h pegoulz. Bep tro ma vo ret nevezat an traoù e vo graet, ma z'eus moien d'ober a-raog, e vo klasket en ober.

Brest écologie solidarités

Graet eo bet hor soñj ganeomp ober, dre ret, gant an div yezh seul wech ma vo adnevezet an traoù, rak ne c'hellomp ket kemmañ ur banell pe ul logo graet nevez 'zo. Ne vefe ket onest embann ar c'hontrol.

10. E-giz kalzig kêrioù pe gumuniezhioù-kêr, hag emaooc'h a-du evit divyezhekaat logoioù Brest hag ar Veurgêr ?

Brest a venir !

Ya... evit hini Brest, ne vo ket re ziaes ! E keñver ar Veurgêr e vo gwelet asambles gant reoù a vo e kuzul Veurgêr ivez.

Brest écologie solidarités

Ya

11. N'eo ket bet divyezhekaet c'hoazh load Brest.fr war ar rouedad, paneve un nebeut pajennadoù sonn... Ur wech en Ti-Kêr, ha graet e vo ganeoc'h ?

Brest a venir !

Klask a reomp ober hiziv an deiz dija en ur skrivañ hon respont e brezhoneg deoc'h. Skrivet hon eus un trakt e brezhoneg penn-da-benn <http://brestinsoumise.fr/dibab-ar-bobl/> hag e glaskfomp mont war-raog gant an dra-se. Al lec'hienn brest.fr a vo tapet en-dro evit ma vije efedusoc'h. Krouet e vo plas ivez evit holl obererienn hon kêr, ma vije posubl dezhe reiñ o soñj (e brezhoneg ma fell deoc'h evel just!). Ma 'z oc'h intereset evit reiñ sikour deomp da dreiñ, e vefec'h degemeret.

Brest écologie solidarités

Dister betek re eo implij ar brezhoneg war lec'hienn brest.fr hag ez eo ar pezh na fell ket deomp ober : ar brezhoneg diouzh ur mod arouezel hepken. War-bouez un nebeud pajennoù digemm, ha na roont keloù nevez ebet, n'eus netra e brezhoneg, koulz lavaret, war lec'hienn ar strollegezh. C'hoant hon eus e vefe lakaet kalz brezhoneg enni, o treiñ ar pajennoù pouezusañ a-raok fin ar bloavezh kentañ, gant ar pal kaout ul lec'hienn zivyezhek pe dost e pa zeuio fin ar garg politikel fiziet ennomp.

12. Daoust hag e c'hellloc'h degemer ur garta c'hrafek divyezhek o talvezout d'an holl dielloù ha teulioù embannet (skritelloù, liesplegoù, furmskridoù...) ha kreñvaat plas ar brezhoneg er gelaouenn "Sillages", gant ur pennad reoliek e brezhoneg da skouer (emañ Sked o skridaozañ ur pennadig bep tro evit ar mare) ?

Brest a venir !

Ma 'z oc'h prest evit sikourat ac'hanomp en ur skrivañ pennadoù e brezhoneg e vefec'h degemeret mat. E keñver an holl dielloù, ma 'z oc'h prest da sikourat ac'hanomp e vo posubl mont war wellaat ivez.

Brest écologie solidarités

Lakaat d'ober muioc'h gant ar brezhoneg ha mont war an divyezhegezh a c'houlenn kalz amzer. Ret eo stummañ tud ha kaout pourvezioù evit-se. Ret eo ober gant ar bedagogiezh evit lakaat ar boazioù da dreiñ. Klask a raimp reiñ lusk d'an titouriñ e brezhoneg, da gentañ holl gant ar binviji implijet war dachenn ar sevenadur hag hini an douristelezh, ha, tamm-ha-tamm, war muioc'h muiañ a dachennoù. Ret eo deomp adembann ar pennadoù berr e brezhoneg penn da benn.

13. Hag-eñ emaoc'h o vont da ziorren divyezhegezh ar furmskridoù paneveken ar re a dalv da c'houlenn skoaziadennoù ?

Brest a venir !

E keñver divyezhegezh ar furmskridoù e soñjomp hag e vije brav en ober evit un nebeut yezhoù komzet e Brest... neuze e vije posubl en ober e brezhoneg ivez.

Brest écologie solidarités

Ya.

14. Penaos emaoc'h e soñj da ziorren bezañs ar brezhoneg en darvoudoù liesseurt (sevenadurel, sportel..)

Brest a venir !

Prest 'omp evit kaout o soñj war ar sujed-mañ.

Brest écologie solidarités

Ar frankiz o deus ar re a ginnig an darvoudoù da embann e brezhoneg, pe get, evel-just. Klask a raimp, koulskoude, o broudañ d'ober gant an div yezh. Graet e c'hello bezañ divyezhek bruderezh an darvoudoù kinniget war-eeun gant an ti-kêr.

15. Hag-eñ oc'h gouest, c'hwi pe unan bennak eus ho roll, da zistagañ ur bommig e brezhoneg pe da gregiñ ho prezegenn gant ur gerig er yezh-se ? En ober a c'hellfec'h e-pad ar c'houlzad-mañ ? Ha degemer hor skoazell mar karit ? Hag ur wezh dilennet ?

Brest a venir !

... war ar seblant !

Brest écologie solidarités

D'an 21 a viz C'hwevrer eo bet roet da c'houzout ganeomp hon divizoù war ar brezhoneg e ti-kêr karter Europa hag implijet eo bet yezh ar vro ganeomp dija, kalz brezhonegerien 'zo war listenn Brest Ekologiezh Kengred, hag anat e teuo deoc'h pa c'helloc'h lenn hor c'helaouenn gabaliñ da zont.